

-I-

ERRUOUT

Deizlevr ker,

Ar wech kentañ eo din duiñ ho paper...

« Ur c'hoar vras out bremañ, hag ur plac'h kirriek » o deus lâret ma mamm ha ma lez-tad p'o deus profet ac'hanout din, kerkent ha ganet ma breurig.

Ennout e c'hellin fiziañ ma holl sekredoù hag hunvreoù. Met, ne 'm eus ket lavaret dit c'hoazh piv on :

Lizaig eo ma anv, trizek vloaz on ha kement a walennoù metal zo war ma dent.

Un deiz e c'hellin mousc'hoarzhin ha diskouez dent ken brav ha re ar merc'hed a weler er bruderezhioù toaz-dent.

Da c'hortoz eo trawalc'h din mouzhañ, dre

m'emaon war ar vag a gas ac'hanon d'an ifern. Brav eo an amzer met dre ma selloù eo louet an oabl.

Ma vefe rinkined e Mor Breizh e lammfen en dour diouzhtu evit bezañ debret ha peurchaoket ganto.

Anat e vefe kalz gwelloc'h din eget mont da vakañsiñ gant an diaoul. Hennezh a zo gwisket gant un hiviz gwenn-kann ha lunedoù ront bordoù ruz a zo war e fri.

E anv bihan a zo Jean-Elouan, pe gentoc'h *Jean-Elou-âne*, evel ma plij dezhañ bezañ graet anezhañ. Ma c'henderv eo-eñ.

Ma mamm a zo en ospital o paouez gwilioudiñ. Re skuizh eo ma lez-tad evit ober war ma zro ha koulskoude en deus ruilhet ma malizenn betek kae Kiberen ha hetet ur sizhun laouen din e ti Mammgozh ha Tad-kozh, en ur reiñ din dre-guzh ur pakadig Malabar.

Spurmantiñ a ran Porzh-Lae, porzh pennañ ar Gerveur, hag ar c'hreñvlec'h divent savet pevar c'hantved zo d'e wareziñ.

Uhel e sav ar mogerioù greunvaen urzhiet gant Vauban, savour roue Bro-C'hall.

Ar pal a oa difenn an enezenn diouzh argadoù ar Saizon. Kontet eo bet an dra-se din gant Tad-kozh, evezhier ar c'hreñvlec'h noz-ha-deiz. Lâret en deus ivez e oa bet toullbac'het eno merc'hed o dije ampoezonet Lez ar Roue ! Ha chomet e vijent

bac'het betek mervel... Ur mirdi eo hiriv an deiz ha gweladenniñ a rin a-benn nebeut al lec'h ken spontus ha meurdezus.

Gwelet a ran touristed o c'hortoz e vefe diskarget ar vag evit krapat ha distreiñ d'an douar bras. Aes eo anavezout anezhe gant o heuzoù melen hag o zicheurtoù bannoù gwenn, bannoù glas. En o mesk e welan ma zud-kozh o hejañ o daouarn da'm saludiñ, kelc'hiet gant o c'hi C'hwezhfall e anv oc'h ober dañs ar joa. Dirazo emañ ma c'henderv o lipat e zienn-skorn diskornet war e vizied. Bras ha moan eo-eñ, evel p'en dije divizet kreskiñ en un taol. Kalon din, ur sizhuniad hepken hag e vin dieub !

Setu, krog eo ar vag da aochañ ha lakaet ar veajourien hag annezidi an enezenn a-bezh da glevet he c'horn-boud.

-II-

TECHOÙ FALL

Deizlevrig,

6

Erruet mat on e ti ma zud-kozh.

Gant ar c'harr-tan omp tremenet hebiou d'ur maner sebezus a seblant dilezet. Ur banell dislivet « E gwerzh » a zo bet skritellet ouzh ar gloued uhel.

— N'eo ket gwerzhet daoust d'e briz dister, en deus lâret ma zad-kozh a-raok ouzhpennañ e oa arabat deomp mont da c'hoari eno.

E foñs al liorzhañ emañ ar maner, damguzhet gant ar geot stank ha brankenn dort ur wezenn-sapr kamm. A-us d'an nor ez eus an niver eizh o vrasigellat.

Goloet eo ar mogerioù a iliaev ha serr eo abavantoù ar prenstri bras. Sklent a vank war an doenn

doull, ha gwelout a raer he zreustoù pounner a ya d'ober he c'horf-eskern.

Daoust hag un tasmant pe ur sorserez bennak a vefe o chom eno ?

En touiñ a ran, deizlevrig : an abretañ ar gwellañ e tizoloin ar maner-se hag e kontin dit e gevrin.

'Fin, arabat din mont re vuan ganti. Un nebeud resisadurioù a zlean dit dre ma zo bet un darvoud ispisial da greisteiz. Ouzh taol e oan asambles gant ma zud-kozh a heje o fennoù krec'h-traoñ a-feur ma tispake ma c'henderv pegen liesseurt eo e zone-zonoù :

— ... Me zo kampion kleub sudoku Roazhon, ha priz ar Reizhskrivadenn Veur a c'hounezan bep bloaz, hep disoñjal e heulian kentelioù sinaeg e diavaez ar skolaj pa ne vezan ket e-mesk ar bomperien yaouank a youl-vat... setu perak em eus bet gourc'hemennoù ar gelennerien hag e vo profet un dron din gant Tadig...

Ha petra 'ta ! An holl a zo gouest d'ober traoù dreistordinal ha da baboriñ am eus soñjet a-greiz kalon. Me, da skouer, me zo ur mailh evit kousket gant ma daoulagad digor. Dreist-holl er skolaj. Setu darbet eo bet din eilañ met d'an nebeutañ ne 'm eus bet evezhiadenn fall ebet da-geñver flape-rezh.

...

C'hoant ho peus da c'houzout, deizlevr kaezh,

penaos em eus lakaet un termen d'e brezennoù emgar ?

Dirazon e oa an dibenn-pred alejet gant Tad-kozh, ur gouign-amann-skañv-evit-yec'hed-mamm-gozh a seblante lipous a-walc'h hag a ijinen evel-just e-kreiz e zremm. Pemp poent a c'hounezfen ma vefe tizhet e vrec'h ha dek ma vefe tizhet e vruched.

Gant beg e fri, avat, e oa peadra da c'hounit hanter-kant poent !

Eñ 'oa o chaokat goustadik ha reiñ din da welet ar boued flastret e diabarzh e veg. Setu, n'am eus ket komprenet petra a zo c'hoarvezet. Tapet em eus ul lodenn eus ar gouign hag hep prederiañ em eus he stlapet war e du. Gwelet a ran c'hoazh evel ha pa vefe difonn an amzer, an tamm gwastell o nijal dindan selloù spontet ma zud-kozh, hag o flastrañ rik etre div werenn e lunedoù.

Chomet eo sonn, fier. Divinet en doa petra 'vije bet da-heul... ha hopala ! Korventenn ar gounnar, kouezhet al luc'hed warnon.

Ma zad-kozh a hopas, ma mamm-gozh a you-c'has hag ar c'hi a glaskas debriñ ar wastell.

— Boulc'hurun ! Alejet em eus ar gatewenn gant ma c'halon, ur spont eo seurt emzalc'h, a skopitellas ma zad-kozh en ur skeiñ war an daol, ruz-legestr-poazh e zivjod.

Ha ma mamm-gozh o terc'hel he c'halon, he deus rediet ac'hanon d'en em zigareziñ. Pezh am eus graet difae.

— Adalek bremañ e tremenoc'h hoc'h amzer asambles hag en em glevoc'h gant bolontez vat pe ne guitaoc'h morse ar Gerveur.

« N'on ket rediet da chom gant ar grennardez dister-mañ, n'eo ket skrivet er c'hod sivil, » a vije bet e respont hervezon. Met lâret en deus kentoc'h :

— Ya Mamm-gozh, gant plijadur.

Souezhet-mik e oan.

Peseurt tanfoeltr mennozh en deus-eñ ? Perak bezañ ken sioul ha sichant ?

Splann eo en deus lakaet e empenn dreistkigenek da vont en-dro a-benn en em veñjiñ gant doareoù kampion, subtil ha cheuc'h. Brezel yen a zo diwanet etrezomp, kuzh, stegn. Ha mennet on da gaout ar maout ! Setu kinniget em eus dezhañ un dae dudius, mont da zizoloiñ ar maner dilezet.

— An hini kentañ a hucho a vo koll !

Straket hon eus hon daouarn ha...

-III-

AONIK ? TAMM EBET

10 Ranket em eus laoskel ac'hanout dindan ar goubenner pa 'z on bet galvet gant Mamm-gozh. C'hoant he doa da'm lakaat da naetaat leur ar gegin saotret ganin, met a-drugarez da C'hwezhfall ne oa tamm roud ebet ken eus ar gatewenn. Paket em eus peadra da vont gant Jean-Elouan : ul lutig (a garger dre nerzh an dorn en ur dreiñ ur bitrak) hag ur voutailhad dour pik-pik.

Mamm-gozh, en he gourvez d'ober he c'houk-kreisteiz dirak ar skinwel, he deus c'hoariet an archerez ha kontet hon eus dezhi ez aemp d'an draezhenn.

Bidennoù, anat dit. Bet omp er maner dilezet evel-just ! Un trouz skiltr he deus graet an nor goad, evel pa 'dije bet c'hoant kelaouiñ ac'hanomp a zarvoudoù skrijus da zont. Kement a boultrenn

a oa er saloñs ma c'helled gwelet stummoù hor sandalennoù war al leur.

Pa ne vije ket gweleoù-kevnid o wiskañ an tasennoù porselen ha pod-te an daol vras em bije soñjet e oa an dud o paouez mont kuit.

E foñs ar saloñs bras e oa un nor damzigor a zibouke war ur gambr. Ur gwele gant liñselioù cheuc'h hag ul lamp-dre-eoul. Ul lamp dre eoul ? N'eo ket bet annezet al lec'h abaoe an triwec'hvet kantved pe betra ? Jean-Elouan en deus digoret tiretenn an daol-noz : un eurier-godell a oa e-barzh. Unan kaer gant klinkadurioù plantoù troidellus. Div bennlizherenn arc'hant liammet gant ur galon, un A hag un F. En digoret en deus o pouezañ war ur bouton : ar biroù a oa sac'het war seizh eur.

D'ar mare-se em eus gwelet ur stumm o fiñval en deñvalijenn. E dapet am eus gant skeud al lutig ha gwelet ur vaouez azezet war ur gador, tri metrad pelloc'h o sellet ouzhomp. Gourlammet hon eus gant ar souezh (hag ivez an aon marteze, ya, ya, en anzav a ran).

Met diskarget e oa al lutig, hag en anken an deñvalijenn e troen ar bitrak buan-ha-buan. Ur wech enaouet al lutig en-dro ne oa den ebet ken war ar gador. Adlakaet an eurier-godell en e blas, serret an diretenn ha zao ! dre ar saloñs da vont kuit avamañ.

Met ar vaouez a oa dirak an nor vras, ur

c'hantolor enaouet en he dorn kleiz ha merzet em eus e oa dislivet he daoulagad.

Gwisket e oa gant ur sae hir, dantelez o pignat betek he groñj. He sae a seblante bezañ koshoc'h eget reoù mamm ma mamm-gozh.

Penaos an diaoul eo 'n em gavet amañ ? am eus lâret din ma-unan.

Re ziwezhat e oa evit tec'hout.

Treut e oa-hi, gwenn-kann he c'hroc'hen. He blev a oa fichet-kaer ha paket en ur torkad luziet evel ma raed gwezhall gozh.

— Hon digarezit Itron, en deus lâret Jean-Elouan seven. Soñjal a rae deomp e oa didud an ti-mañ. Pe anv bihan 'peus ?

He respont nemetañ a zo bet ur mousc'hoarzh kevrinus en ur gemer ar pod o tivogediñ, a seblante goullo tuchantik ha servijet an dourenn domm e pep a dasenn borselen.

Ur pennadig digaoz war-lerc'h eo savet ma c'henderv gant an ezhomm da « cheñch dour d'ar pesked » evel ma lavarar ha pa 'z eo distroet eus ar privezioù e oa kement a vall da achap warnomp m'hon eus lonket fonnapl pep a vanne te divlaz, trugarekaet ar gouviadez ha tec'het d'an daou lamm.

— N'he deus ket distaget ger ebet !

— Ha merzet ho peus liv ar marv warni ?

— Pegen Iskis ! hon eus lâret a-unan.